

# EVIDOUT EO AR C'HELOU MAD

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg



**Diskan :** Evidout eo ar C'helou mad  
Embannet gand Jezuz :  
Bugale om ive d'an Tad,  
Gantañ 'vezim eüruz.

1. Er mintin-se, er zinagog,  
An oll a jomas mud,  
Rag Jezuz 'gomze gand galloud  
Heb aon dirag an dud.
2. Ha pa c'hros molas an dén foll  
'N eun taol e kounnar ruz,  
Gand nerz e Gomz dirag an oll  
E tehas an droug kuz.
3. Da di Simon hag Andre 'z eas  
Gantañ Jakez ha Yann.  
Mamm-gaer Simon a bareas,  
An oll e welas splann.
4. Dirag an nor 'n em vodas kêr,  
Pa oe kuzet an heol  
Ar peoc'h 'roas e berr amzer,  
Ha laouen oa an oll.
5. Er-mêt a-raog ar goulou-deiz  
E pede 'vid péb dén.  
Ar C'helou Mad 'zo 'vid 'n dud keiz,  
Deom pelloc'h d'e gelenn.

*C'EST POUR TOI LA BONNE NOUVELLE*

*R: C'est pour toi la Bonne Nouvelle  
Annoncée par Jésus :  
Nous sommes aussi les fils du Père,  
Avec Lui nous serons heureux.*

1. Ce matin-là, dans la synagogue,  
Tous se turent,  
Car Jésus parlait avec force,  
Sans peur devant les gens.
2. Et quand le fou se mit à gronder  
D'un seul coup en colère,  
Par la force de sa Parole devant tous,  
Le mal caché s'en alla.
3. Il alla chez Simon et André,  
Avec Jacques et Jean.  
Il guérit la belle-mère de Simon,  
Tous le virent bien.
4. Devant la porte s'assembla la ville,  
Au coucher du soleil,  
En peu de temps Il donna la paix,  
Et tous étaient joyeux.
5. Sorti avant le lever du jour,  
Il pria pour tout homme.  
La Bonne Nouvelle est pour les pauvres gens,  
Allons plus loin l'annoncer.